



KEMENNADENN GELAOUÏÑ

COMMUNIQUE DE PRESSE

d'ar 27 a viz Mae / 27 mai 2025

Emvod Ar Redadeg - Korrika -La Passem e Roazhon

Réunion la Redadeg – Korrika - La Passem à Rennes

(en français plus bas)

Emgav ar redadegoù e Roazhon etre Ar Redadeg, Korrika ha La Passem.

Meur a yezh zo bet klevet d'ar Sadorn 17 a viz Mae e ti Skol An Emsav e Roazhon : brezhoneg evel just gant tud ar Redadeg, euskareg gant reoù ar C'horrika hag ivez okitaneg e genoù izili la Passem ur redadeg evit ar yezh-mañ e Gaskogn. An eil gwech e oa d'an aozerien ar redadegoù en em gavout evit eskemm mennozhioù ha skiant-prenet goude an emvod kentañ e Baiona e miz Kerzu 2023. Dibaoe e oa bet redet gant an holl ha berzh a zo bet koulz e Breizh hag Bro Euskal ha Gaskogn.

Ul labour gant an holl zo bet e penn kentañ an devezh evit ur bilañs eus pep aozadur a-raok ul labour dre strolladoù, unan o labourat war ar c'hehentiñ, an eil war an teknik en heuliadeg : staliadur ar c'hamionoù, filmañ ar redadeg war eeun, sono hag ivez surentez ar rederien...

Ur c'hoant bras a zo d'ober traoù asambles, da skouer un darvoud boutin ar bloavezhioù hep redadegoù, mirout ur c'hilometr e dibenn pep redadeg evit ar yezhoù all, pediñ arzhourien pep kanaouen evit an degouezh pe ur mare all, lenn ur gemennadenn boutin en degouezhioù...

Labour zo war ar stern ha plijadur vo c'hoazh da gas hor raktresoù skoazh ouzh skoazh pe dorn ha dorn.

Ar Redadegoù o tont :

- Korrika : 19 – 29/03/2026 eus Ipparalde (Norzh ar Vro) betek Bilbo
- La Passem : fin miz Ebrel – penn kentañ miz Mae eus Bedus da Anglet
- Ar Redadeg : 08 – 16/05/2026 eus Lannuon da Naoned

Rencontre des courses pour les langues entre Ar Redadeg, Korrika et La Passem.

On pouvait entendre plusieurs langues le samedi 17/05 dans les locaux de Skol An Emsav à Rennes. Le breton bien sûr avec les représentants de Ar Redadeg, le basque avec ceux de la Korrika et aussi l'occitan avec les gascons de la Passem. C'était la deuxième rencontre entre organisateurs de courses pour les langues minorisées après une première en décembre 2023 à Bayonne, et ce fut encore l'occasion d'échanger idées et expérience.

Un premier moment avec l'ensemble des participants a permis de faire un bilan des 3 organisations avant un travail en 2 groupes : l'un travaillant sur la communication, le second sur les questions liées au convoi d'un point de vue technique, installation des camions, sono, diffusion de la course en direct mais aussi sécurité des coureurs...

L'envie de travailler ensemble est bien présente, il a par exemple été évoqué de créer un événement en commun les années sans courses, d'inviter les artistes créateurs des chansons de chaque course lors des arrivées ou autres événements liés aux langues, de lire un message en commun lors de chaque arrivée...

Du pain sur la planche et sûrement encore beaucoup de plaisir à faire avancer les projets main dans la main.

Les prochaines courses :

- Korrika : 19 – 29/03/2026 du Pays Basque Nord à Bilbao
- La Passem : fin avril – début mai de Bedus à Anglet
- Ar Redadeg : 08 – 16/05/2026 de Lannion à Nantes